

# Ali ar Roue Salomon

Selaouet gant spont hag eston  
 Ali ar Roue Salomon  
 Gravet hen don en ho spered  
 Ha biken pec'hed na refet.

Ret eo mervel, hag en instant  
 Komparissa er jujamant  
 Deut eo an arret hep appel  
 D'ar gloar pe d'an tan eternel.

Ar pez zo kaoz ma ren er bed  
 En touez pep sort tud ar pec'hed  
 Eo a boan e kefer unan  
 A zonjer finio divezan.

Rag ar c'horf hervez an natur  
 Ne glask nemet he blijadur  
 Ha koulskoude en ber, hep mar  
 Ez ai da vreina en douar.

Ar c'horf a zo en pep fesson  
 Ken dilikat ha ken minion  
 Mes goude bea re vaget  
 E vo ive boed d'ar prenved.

Ar bed ma a zo ken treitour  
 Evel eur bluen var an dour  
 An nep en em fizio ennhan  
 A vezozur tromplet ganthan.

rometi a ra hir vue  
 Yar re a zo var bord ho be  
 D'ar re iac'h ne glanvfont ket  
 D'ar re glany e promet iec'hed.

Ne laket ket ho kalonnou  
 Er bed ma da zastum madou  
 Madou ha pa vent dastumet  
 N'en d'int netra nemert moged.

Rag goude kement fatig  
 Evit n'em renta pinvidik  
 Petra po evit ho poan  
 Po sortifet euz ar bed man ?

Eur c'hos insel, pevar flanken  
 Eun dorchen plous dindan ho pen  
 Seta eno ho heritach  
 Ha n'ho po ken evit partaj.

Na fiziet ken en ho iec'hed  
 N'ho iaouankis, en ho kenet  
 Ar maro zo kren hag a ziskar  
 Ar re nerzuza d'an douar.

N'hen deuz na madou na noblans  
 Genet na braster na bombans  
 Disent euz lezen ar maro  
 Ho falch'et a raio pa garo.

